

KANAOUENN NEVEZ

WAR SUJED TORFED ROAZON

7^{vet} a viz Eost 1932

War don : **Emzivadez Lannuon (Barzaz Breiz)**

(Doanius-meurbet)

1

Didostait Bretoned, ha c'houi 'glevo kana
Eur son en nevez savet war sujed eur gwall dra.
O ! na d'in eo rann-galon konta d'eoc'h kement-man,
Gwall gelou d'ar Vretoned 'zo diredet aman !

2

D'ar seizvet a viz Eost, naontek daou ha tregont,
Tud Roazon en o gwele 'deus krenet gant ar spont,
Da c'houlou-deiz o klevet ar gurun o tarza,
Petramant eun taol kanon o freuza kement tra.

3

Savet e lost o roched, int na weljont netra,
Nemet eur bouilhad moged en aer o tispaka ;
Kabiten ar bolised hag a oa kousket mat,
Buan a lak e vragou hag a zired timat.

4

Ouz e vouez an archerien, 'souden 'zo dihunet ;
'N eur frota o daoulagad setu int o tonet.
Diastenn 'reont o divrec'h, bazailhat, hej' o c'hein,
Ha chom e-giz abafet, 'n eur welet eur bern mein.

5

'Vit eur bern mein ne oa ket, 'ni oa bet dibradet,
Pennou ha korfou brevet *en arem* 'laran ket :
Edo ar Frans diskaret, o lipat ar boultrenn,
He fri ganti en douar, troet ganti he fenn.

6

War blasenn ti-kêr Roazon 'baoue pemp eur mintin,
'Z eus eun asamble charmant a dud a sao o min,
O sellet 'z eun toull gollo. 'vel genou an ifern,
Dirak ar paour kaez skeudenn a-stlabez en eur bern !

« Me 'oar mat, eme tud 'zo, petra 'zo degouezet »
 Gant an « otonomisted » an taol-man 'zo bet graet »
 Antronoz kazetennou a gonte penn-da-benn
 An troiou eus an afer, 'n eur skriva evel-hen :

8

« Evit eun torfed euzus, heman sur unan eo !
 « Ret eo lakaat er prizon ar muntrer en e veo,
 « E laza hag e grouga, hervez m'eo al lezenn,
 « Trawalc'h 'n deus graet emichans, ra vo trouc'het e benn ! »

9

Kerkent ar boliserien 'voe laket da redek,
 Dre bep korn eus a Vreiz, da ober furchadeg
 E Gwengamp, Brest ha Roazon, hag e lec'h all moarvat.
 Ar pilhaouer a roio, 'vit o paper priz mat.

10

'Kreiz dismantrou ar skeudenn, eun « expert » a zo deut,
 Sellet 'ra gant lunedou, daoubleget e gorf treut.
 Kavet 'n deus diou vombezenn, e Paris oant bet graet,
 War unan eus an tammou, ar ger-se 'oa skrivet.

11

Eur pakad gwak ha pounner 'voe lezet en eun ti
 Journaliou ? leoriou ? poultrenn ? ha gant se petra 'ri ?
 Nemet setu m'eo tapet, c'houec'h den didamall-kaer,
 Ha dalc'het int e prizon, 'giz ma vez graet d'al laer.

12

Poent eo d'in breman tevel, re bell me 'gred omp aet
 'Vel ma lar ar journaliou, arabat 've chalet
 'No labour 'r bolised o furchal dre ar vro ;
 Marteze 'vezo savet eur skeudenn all en-dro.

Da echui

Er bloaz naontek hag unnek eur skeudenn 'voe savet,
 En *enor* d'ar Vretoned da Vro-Frans unanet,
 Ha setu, va zud karet, torfed eur re daonet,
 Eur monumant ken kaer 'zo breman distrujet !

UNAN DOANIET.

